

# CHANSON NEVE

VAR SUJET

## EUR BROMESE FERVANT HAG EUR SEPARASION ETRE DAOU DEN YAOUANK

Var don ar *Fauz Promese.*

Prosternet e ma c'halon  
N'ho prezans, Bretonet,  
Vit goulen o c'haltansion  
Eur momet en sekret :  
Me disclerio en guirion  
Eur bromese fervant  
Hac eur separasian  
Etre daou den iaouank.  
  
Na fell ket din er poent-man,  
Dont d'abuzin paper;  
Sujet avoalc'h a gavan  
Hep asten ar matier.  
Eur re-bennag, marteze,  
A guemero an er  
Da meprizan ma bue,  
Dre ma c'hespliki skler.  
  
N'on ket digu a droug-zello,  
Pa n'am anavest ket,  
Rac zavantoch' evidon  
A zo bet a'em leayet.  
Ebars en laso Venus  
Hac e mab Cupidon  
Pere a rent maleureuz,  
Sivoas ! meur a galon.  
  
Me zo eun den iaouank  
Hac a meus consentet  
Karout eur plac'h iaouank  
Dign da vean karet ;  
Vit dirag ma daoulagad  
Na meus remerquet hini  
Da gad eun er ken agreabl  
Herve ma fantasi.  
  
Vel gant Done inspireret,  
Da ouel an Assumption,  
Me a zo bet azeet  
N'he c'hichen, 'n eur pardon.  
En parouz Pieudaniel,  
Kichen eur goz iliz  
Eur plas devot a zantel  
Goude fin an ofiz.  
  
Eno Var deuar ar Verc'hez,  
Me meuz bet remerket  
He skiant hac e furaez  
Ha memez e genet.  
Me meuz groet reflecion  
Ha n'em sonjet erfat  
Na m'omp biken separasian  
Vit mar be ze d'he grat.

Abofster ma iaouankis  
A neus ma arrelet  
Bet a voan vit n'em diviz,  
Ha pa meus ket kredet  
Parlant dei e nep fesson  
Deneus ar garante  
A zanten bars em c'halon  
'N be c'hever en deze.  
  
Nao miz om bet en guirion,  
Hep en em ranccontri  
Delc'het ho c'hattansion  
Iaouankis, me o suppli  
Ainan e teu Cupidor  
Gant eun ardeur neve  
Da alumni, 'n em c'balon  
Elemancho a garante.  
  
Annoas a riz d'ar plac'h-se,  
O vont d'eun assemble  
Penoz am boa belante  
Da gat e c'hamitie :  
Hac evit 'n em assuri  
Deus he fidelite,  
A meut goulet diganti  
Ober din promesse.

AR PLAC'H.

\* Ma mignon, nimp so iaouank  
D'ober promesseou :  
Gant ann disteran tourmant  
A chanch hon ideou ;  
Mar torfemp hon promesse  
Hac ober eur parjur  
Me fell din en em bue  
Kavel eur guir assur. \*

AR POTR.

\* Birviken an amizer fall  
Na allo distruan  
Ar garante leal  
Pihini a dougan ;  
Mes me zo en disfians  
Demeus ho carante ;  
Roet din ann assurans  
Vit ar rest hon bue. \*

AR PLAC'H.

\* Arsa eta, ma mignon,  
Pa omp en plas hirie  
Na vo quet dre draison  
A ri dec'h promesse

Kemer a refomp vit test  
Eun avocat a Dreguer,  
Rac on c'halon so c'hoas fresk  
Da chom hep culateur. »

He dorn en em hini,  
Prosternet d'an daoulin  
Dirac Sant Ervoan Elouri,  
Mab-henan Kervarzin,  
En ilis ar Minihi,  
An naontek a viz mae  
A prometjomp dimezi  
Hon daou ann eil d'eguile.

Sekret ve ar promesse  
Dirac eur bopl a leiz,  
Pere dired en de-ze  
A bep coste a Vreiz.  
Da velet penn ho avocat,  
Dre guir devotion,  
A douger var eur brancait  
Bars er procession.

O solennite joaüz  
Evit eur popl a fe ;  
Biskoas de ken euruz  
N'em boa cat em bue,  
Zantout a ran na c'halon  
Val benet mesk ar joa ;  
Mes ret e cat separasian  
Rac an noz a dosta.

AR POTR.

\* Arsa, plac'h iaouank fidel,  
Poent eo disparian,  
An heol zo arri izel :  
Leket din breman  
Eun termen d'a n'em gavet  
Herve ho polante,  
Rac pell a omp separat  
An eil deuz eguile. »

AR PLAC'H.

\* Dé eisvet ar Sacramant  
Bars en kær Landreguer,  
Zo eun assamble charmant  
Gant ar bohl ar c'hartier :  
Mar be ze d'ho polante,  
Hon daou n'imp ario  
En Landreguer, en de se,  
Goude ar gouspero. »

### AR POTR.

Var kement-ze, merc'h iaouank,  
Me souet dec'h bonsoar,  
Gant kals a agreamant  
Me a dalc'ho memoar,  
D'an termen a c'heus fieset,  
Kredet me 'nem gavo ;  
Na vefomp biken separer,  
Vit ar rest on deyo.

Pa ariis bars er guer,  
A meus bet ispliket  
D'eun tad a d'eur vamm tener  
Ar bromesse moa gret.  
O daeu a skujont daero  
O c'hanaveout mo chanz ;  
Mes nôs eo pell a zo,  
Reposomp en silans.

Kerken e vanez kousket,  
Vel' n eur ravissamat,  
Hac e meus bet remerket  
Eur groas ker a arc'hant,  
Ha varni eur garuneu  
Ornet gant greun perles,  
Pozet en kreis eur bleau  
Eu kichen ma mestres.

Dre spont on bet difanet ;  
Mes goelet meus bet erfat  
Ma mestres bars'n eun archet  
Dirac ma daoulagad :  
Bet on pell o venorin  
Var sujet kement-ze ;  
Mes rabet eo 'n droublin  
Ait actou eun unvre.

Tostad a ra d'an termen  
Pini m'amp asiuet ;  
Mes goelet a ran eun den  
O tonet d'am c'havet :  
Roet neus din eul lizer  
A zo bordet en du ;  
Petric zo var ar paper,  
Ret eo goelet dustu.

### *Al lizer.*

« Salut deoc'h ma guir vignon  
« C'hoas eur vech, dre speret ;  
« Nin quet d'an assassin  
« A moa dec'h promettet.  
« Skoet on gant eur c'hlivet,  
« Me gret vit ar maro,  
« N'omp ket gant Done choaset  
« Vit bean priejo.

« Ma be a deui da gleuzan  
« Var ben neubeut amzer.  
« Vit ar veach divezan,  
« Adieu, ma servijer,  
« Gras dimp da gaout chans,  
« D'an n'em velet er gloar  
« Evit hon recompans. »

AR POTR out-ha he unan.

« O bleuen ken florissant,  
Mar kouees d'an douar,  
Tont ma oll agreamant  
A chancho en glac'har ;  
Oll esperans ma deio,  
Plidjur ma bue.  
Assembles guenit a goco  
Da repos bars da ve.

Rabet eo disconsoli  
Vit guelet al lizer,  
Ann termen a so arri,  
Varc'hoas, en Landreguer,  
Me a gleva a beurs mad  
Ha guir eo kement man ;  
Ar piper a lest lakat  
Sort a guerer varnan. »

Arri bars en Landreguer,  
D'an termen asinel.  
Vel ma sonnaz peder heur,  
Me meuz bet infantet,  
Enr plac'hik iaouank, o tremen,  
Lapet d'he c'hamaradez :  
« Sell aze, emezi, eun den  
Zo maro he vestrez. »

Poigardet eo ma c'halon  
Ken a friu ma goad  
Vit klevet he declaration  
E c'havensis d'he c'hat :  
« Respont din, merc'h iaouank,  
Mar be ho madelez,  
Me a c'houi humblamant  
Penoz a ra ma mestrez. »

### AR PLAC'H IAOUANK.

« Na servij het, den iaouank,  
Rei dec'h anoudegues ;  
C'houi a zo bet eun tirant  
En andret ho mestrez :  
Hi diwoar goele ar maro  
A lekas he foan  
Da skrivan dec'h ar c'helou  
Mes c'heus ket groet a van.

Me a moa e c'hasistet  
Da skrivan al lizer  
Goude ma franchisset  
Ha roet d'ar facteur,  
Hi finissas he bue  
D'ar goener d'abarde,  
Ha herie deus ar beure  
E diskennel' n he be. »

### AR POTR.

« Me moa kals a esperans  
A voa fauz al lizer  
Pe groet gant tud a blezans  
Vit tremen ho amzer.  
Mes ho komzo ken pikant  
A boes var ma speret.  
Me a lar dec'h, merc'h iaouang  
Kenavo 'r c'chenta goelet. »

Kouitat a riz au assamble  
Occupet ma speret :  
Rak me en em vel hirie  
Maleurus var ar bed.  
Ma mestres a zo maro  
Ha me a chom breman  
Da dipitan ma deio  
Var he lerc'h er bed-man.

N'anvean ket ar matier  
A galmfe ma glac'har ;  
Me na mo ken mes malheur  
Biken var an douar,  
Pa velan peguen iaouank  
E c'he deud ar maro  
D'an plomji bars en tourmant  
Deus a greis tua joao.

Servij ket din chom aman  
Da ispliken kanvo  
Rak na allan ket kanan  
Ha goelan var eun dro ;  
Supplian a ran Done  
Maro var ar C'halvar  
Ma recevo he c'hine  
Ha nimp oll en he glear.

Groot gant PIERRE RÉSON,  
Goude bean recevot nu deklarasion  
Digant eun den iaouank dezolet  
Gant glac'har d'e vuau karet.

(Propriété de l'Éditeur.)

